

KANTIK ITRON VARIA LORETA

(Ton : Itron Santez Anna – Skriver : Laurent Pennarun / Yves Velly – Tr : Lukian Kergoat)

| Diskan | Refrain |
|--|--|
| <p>Deredomp da bediñ An Itron Varia, Kanomp holl meuleudi Patronez Loreta.</p> | <p>Accourons pour prier Notre Dame Chantons tous les louanges A la patronne de Lorette.</p> |
| <p>1</p> <p>Ti bihan Nazaret, 'Welas kreskiñ Jezuz, Dizale oa kouezhet En ur stad truezus.</p> | <p>1</p> <p>La petite maison de Nazareth, Vit grandir Jésus, Sans tarder, elle tomba Dans un état pitoyable.</p> |
| <p>2</p> <p>Diskibien Mahomet, Enebourien hor feiz, O deus en diskaret, Hep douetañs un deiz.</p> | <p>2</p> <p>Les disciples de Mahomet, Ennemis de notre foi, L'ont démolie, Sans aucun doute, un jour.</p> |
| <p>3</p> <p>En Itali neuze, Gant an aelez douget, E-kreiz ur c'hoad lore, Ar bez a oa pozet.</p> | <p>3</p> <p>En Italie, dès lors, Par les anges transportée, Au milieu d'un bois de laurier, Le tombeau fut posé.</p> |
| <p>4</p> <p>E kêrig Loreta, Ti hor Mamm benniget, A vez gwelet bremañ, Gant arc'hant goloet.</p> | <p>4</p> <p>Dans le petit village de Lorette, La maison de notre Mère bénie, Se voit maintenant, Avec une couverture d'argent.</p> |
| <p>5</p> <p>A bep tu deus ar bed, Ar paour, ar pinvidig, A zeu da lavaret, D'hor Mamm ur bedennig.</p> | <p>5</p> <p>De chaque coin du monde, Les pauvres, les riches, Viennent dire, A notre Mère, une petite prière.</p> |
| <p>6</p> <p>Ni ivez, Bretoned, A ya da bardonañ, En ur chapel savet, D'an itron Loreta.</p> | <p>6</p> <p>Nous aussi, Bretons, Nous allons au pardon, Dans une chapelle construite A Notre Dame de Lorette</p> |
| <p>7</p> | <p>7</p> |

| | | | |
|----|---|----|--|
| | Bremañ 'z eus daou c'hant vloaz, War barrez Plogoneg, 'Oa un den brudet bras, 'Vit e feiz kalonek. | | Cela fait maintenant deux cents ans, Dans la paroisse de Plogonnec, Se trouvait un homme renommé, Pour sa foi valeureuse. |
| 8 | Un deiz e tiskennas, Deus e gastell, laouen, 'Vit treuziñ ar stêr vras, Da welet ar beorien. | 8 | Un jour il descendit, De son château, joyeux, Pour traverser la grande rivière, Afin d'aller voir les pauvres. |
| 9 | Mont a ra hep ehan, En dour kounnaret holl, An Aotrou Rubihan, En naoz o vont da goll. | 9 | Il avance sans s'arrêter , Dans les eaux déchainées, Le seigneur de Rubihan, Dans le chenal courant à sa perte. |
| 10 | War-zu Mari neuze, E kasas e spered, Itron, va Mamm, eme(zañ), Deuit, va sikourit ! | 10 | Vers Marie alors, Il tourna sa pensée, Notre Dame, ma mère, dit-il, Venez, secourez-moi ! |
| 11 | Me a bromet sevel, Mar karit va sikour, Gwerc'hez, deoc'h ur chapel, Amañ, war bord an dour. | 11 | Je promets de construire, S'il vous plaît de venir à mon secours, Vierge, pour vous une chapelle, Ici, au bord de l'eau. |
| 12 | Kerkent en em gavas Gantañ treuzet ar stêr ; E-kichen e savas Ur chapel meurbet kaer. | 12 | Aussitôt il se trouva sur l'autre rive de la rivière ; A côté il construisit Une très belle chapelle. |
| 13 | 'Tre daou venez uhel, Goloet a goajoù, Mari, hor Mamm santel, A skuilho kalz grasoù. | 13 | Entre deux hautes collines, Couvertes de bois, Marie, notre Sainte Mère, Y répandra beaucoup de grâces. |
| 14 | Er chapelig vihan, Kalz brudet tro-war-dro, Dizale pep unan, Gant feiz a zaoulino. | 14 | Dans la petite chapelle, Très renommée aux alentours, Sans délai, chacun, Avec foi, s'agenouillera. |

| | | | |
|----|--|----|---|
| 15 | <p>Na pet o deus kavet, E chapel Loreta, Joa, o lavaret An Ave Maria.</p> | 15 | <p>Ô, combien ont trouvé, A la chapelle de la Lorette, De la joie, en disant L'Ave Maria.</p> |
| 16 | <p>Re vihan e teuas ; Frankoc'h war ar menez, Koantoc'h evit biskoazh, Eo savet a-nevez.</p> | 16 | <p>Elle devint trop petite ; Plus étendue sur la butte, Plus jolie que jamais, Elle est reconstruite.</p> |
| 17 | <p>Bep bloaz hon tud yaouank, A-raok mont d'an arme, Amañ a deuo stank, Da resev o Doue.</p> | 17 | <p>Chaque années nos jeunes gens, Avant d'aller à l'armée, Ici viennent nombreux Pour recevoir leur Dieu.</p> |
| 18 | <p>Dezho, Gwerc'hez santel, Digorit ho kalon, En goudor ho skoazell, Roit proteksion.</p> | 18 | <p>A eux, Vierge sainte, Ouvrez votre cœur, A l'abri de votre secours, Donnez-leur protection.</p> |
| 19 | <p>Ho ped soñj mat bepred, Ez int bugale Breizh, Ha n'o dilezit ket, E-touez an dud difeiz.</p> | 19 | <p>Rappelez-vous bien toujours, Qu'ils sont enfants de Bretagne, Et ne les abandonnez pas, Au milieu des gens sans foi.</p> |
| 20 | <p>Deus ar menez uhel, Ra gouezho, deiz ha noz, War ho parrez fidel, Ar glizh eus ho pennozh.</p> | 20 | <p>De la haute montagne, Que tombe, jour et nuit, Sur votre paroisse fidèle, La rosée de votre bénédiction.</p> |
| 21 | <p>Dalc'hit en hon touez, Feiz start hon tadoù kozh, Ma'z aimp holl asambles, D'ho kaout er baradoz.</p> | 21 | <p>Gardez parmi nous, La foi ferme de nos aïeux, Pour que nous allions tous ensemble, Vous rencontrer au paradis.</p> |